

390

Guerrz ar Golen.

(209)

Var tou Cantic Sant Roch.

Diredit oll, va brois ger Bretonet,
 Evit silaou un detaiñ ar gaera,
 Pehini sur ho laqai oll estonet,
 Rac foeldr biscoas na glévjot ur seurt tria.
 Va faribolen
 Zo var ur Golen
 Reut var e zroad,
 Eur c'hart leo diouz Pen'hoad.

Ebars ur parq, tost da chapel Kynilis,
 Pehini zo ebars parros Guichan,
 E zeus poulset; bremâ zeus daou pe dri mis,
 Ur Golen gaer a spront Janned ha Yan.
 Plat vel ur solen,
 Dirac ar Golen,
 Pep pelerin
 En em string d'ar daoulin.

Ar Golen-mâ, evit gvir, so estonus,
 Rac formi ra, a leter, ur groten,
 Fleur alaouret, arranget gen burzudus,
 A zo endro evit orni e fenn.
 Ur chipot holen
 A form ar Golen,
 Hac ezeo ret
 Douguen derzi respet.

(210)

En amzer gôs, habitantet an Egypt
 A adore evel o doueou
 Un ognonen, ur c'harz, un eugen, ur philip,
 Hac a bep seurt loëned, legumachou;
 Va brois ive,

Leun a biete,
A soubl o fenn
Bete reor eur golen !

(211) Terrupla tria ! eme Mari da Janned,
An dra -mâ so sin ouz un dra benac ...
Hac e tlefen gant va goas bezja cannet,
Na rân foeldr fors, nac enmic, nac enmac :
Deomp da Kynilis,
E corf hon invis,
D'ober offrang,
Da gaera Colen frang.

An diou gommer a laqas reded ar brud
Partout dre r vro e voa grêt miracl bras.
Gant ar Golen, ma tîredas nombr a dud,
Espicial saout ha moc'h a bep plaq.
Dirac o doue,
Int en em stoue,
Gant calz respect,
Erit caout o reget.

(212) Rac - se, tud fur, carquet oll a gonfianç,
Hastit da zont d'adori ho Colen.
Hastit eta eno 'perzo audianç ;
Mes na dorrit nac ho reor nac ho penn.
Hac evessêt pis
Bio'h loüe, pe vis,
Rac, hep morse,
E longfent ho toue.

Pebes fin trist a velan - me d'ar golen !
Rac houmâ sûr, daoust d'e oll galite,
A renq, hep mar, evel ur greunen haolen,
Bezja teuzet en eur bern teil goude.
Rac-se, goüelomp oll
Var ur c'her bras coll,
Hac a boës penn
Griomp : Vit ar Golen !!!...

A. L. M. L.